

LEVRIOU AR VUGALE

GWENNIG
ha GWENOLA

12

AL LIAMM
1959

Gwennig ha Gwenola



Skeudennoù gant Per Nardin

AL LIAMM



« Na brav an amzer ! » a lavar Gwenola o tigeriñ
he frenestr.

Ar mintin eo.

Ur wennilienn a nij laouen.

« Deus buan er-maez da c'hoari ! » emezi.

E porzh ar vereuri ar c'hilhog a gan.
« Kotogotogog, » eme ar c'hilhog.
Ar yar a ziwall he foñsined melen-aour.
Ur vamm vat eo.



Gwenola he deus pemp bloaz hiziv. —
 He mammig he deus graet ur wastell.
 Ur wastell gant goulaouennoù bihan war-c'horre.
 Gant pemp goulaouenn, evel just, peogwir he deus
 Gwenola pemp bloaz.



Rouzig, ar c'hi, ha Bisig, ar c'hazh, a garfe kaout
 o zamm diouzhtu.
 Rak c'hwez-vat, ur bam, a zo gant ar wastell.
 Met n'eo ket deut c'hoazh poent debrisñ.

« Deomp da bourmen ! »

An nevez-hañv eo.

Roz eo ar gwez-avaloù, gwenn, roz-tener.

Na plijus eo bezañ er-maez.



An tulipez a zo digor.

Bleunioù melen ha glas a zo, forzh pegement.

Gleb int c'hoazh gant glizh an noz.

Evel pa vije perlez warno.



Hag al laboused !

Ne reont ken kanañ, richanañ, c'hwitellat !

Echu ar goañv, deut an tommder,

Poent eo ober nezhioù ha sevel re vihan.

Dindan an doenn ez eus labour gant ar gwennili.

Tri labous bihan en neizh, naon du ganto bepred.

Hag an tadig, hag ar vammig, ne reont ken degas
dezho boued : preñved, kelien, amprevaned a bep
seurt.





Ur pintig bihan a zo kouezhet eus e neizh.

« Labousig paour, c'hwi 'vo debret gant ar c'hazh, » a lavar Gwenola.

Hag e kemer al labousig

Hag e lak anezhañ en-dro en e neizh.

« Met petra 'zo aze er bradenn ? » a c'houlell Gwenola.

Un oanig.

Gwenn-kann.

Nevez-c'hanet.

Poan en deus o vont en e sav.



E vamm a lip anezhañ, a sikour anezhañ da sevel.

Ha goustadig ez a d' he heul, e-touez ar geot flour, dindan ar gwez e bleuñv.

« Na brav eo bevañ ! » emezañ.



Bamet eo Gwenola.

« Oanig, oanig bihan brav, daoust hag e fell deoc'h bezañ va mabig ? »

Kemer a ra anezhañ en he divrec'h, flourañ he jod ouzh e bennig.

« C'hwi 'vo Gwennig, va Gwennig din, peogwir ez oc'h ken gwenn ! »



« Mammig, mammig, sell petra 'm eus kavet er
bradenn !

Ro anezhañ din, mammig !

Peogwir em eus pemp bloaz hiziv.

Me 'raio brav war e dro. »

8.15

Ha Gwenola a daolas evezh bras ouzh an oanig.
Kas a rae anezhañ da zebriñ e-lec'h ma oa ar
flourañ ar geot.

Ha goude-se da evañ dour fresk er wazh-dour.



Brav e oa ar vuhez.

Met hiziv n' eo ket mui laouen Gwennola.

Gwennig a rank mont kuit.

Gwennig a rank mont, gant an deñved all, da dremen an hañv er menezioù.

Leñvañ 'ra Gwennola.



A-wechoù e rae van da vezañ kousket er geot.
Gwennig a zeme da zihunañ anezhi gant e fri gleb.
Hag o-daou d' ober toutig-penn goude-se.
Na plijadur !





« Pa zeuot en-dro, n' ho po ket mui soñj ac'hanon !
Ha me, penaos hoc'h anavezin a-douez an deñved
all ? »
Ur valafenn he doe truez outi o ouelañ.
Gant hec'h askell, e lakaas ur merk du war dal
Gwennig.

Gwennig a vilee e penn an tropell, pa zeuas en-
dro d' an diskar-amzer.

Na kreñv e oa bremañ !

Ne oa dañvad all ebet bravoc'h egetañ.

War e benn en doa atav ar merk du.

Na plijadur he doe Gwenola o pokat dezhañ.





Hag abaoe an holl re vihan o deus bet atav ar merk du war o fenn.

N'eus ket mui kalz tud o deus soñj penaos eo deut ar merk-se dezho.

C'hwi 'oar bremañ, bugale, ez' eo deut dre garantez ur plac'h bihan.

Daoust ha n'eo ket brav an istor ?

LEVRIOU AR VUGALE

| | |
|-------------------------------------|-----|
| 1. PAOTR E VARO GLAS | 150 |
| 2. MERCHIG AR ROZENN | 150 |
| 3. AR C'HEMENER BIHAN KALONEK | 180 |
| 4. ROBINSON KRUSO | 180 |
| 5. ISTOR MEUDIG | 150 |
| 6. AR GOANTENN E KOAD AR C'HOUSK .. | 150 |
| 7. AR C'HAZH GANT HEUZOU LER | 150 |
| 8. LUDUENNIG | 150 |
| 9. KABELLIG RUZ | 150 |
| 10. GWENN-ERC'H HAG AR SEIZH KORRIG | 150 |
| 11. KISTINENN | 200 |
| 12. GWENNIG HA GWENOLA | 200 |

P. BODENAN, 3, Chemin des Potiers,
Ergué-Armel, Quimper — C. C. P. 212-23 Rennes

Pep gwir miret strizh gant BIAS ha PER DENEZ

